




K
R
O
A

B
R
E
I
Z

EOST 1948 ④ PRIZ : 25 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Dre Hor Zalver Jezuz-Krist (Y.-F. Falch'un).....	Pajenn	1
Psalmou ar Binijen (F. Guivarc'h)	—	3
Goueliou ar Miz (An Tad)	—	4
Sant Loeiz-Vari a Vontfort (Y. Tranvouez)	—	5
Hanter-Eost (Loeiz Lok)	—	7
An Aotrou 'n Eskob Duparc (P.-Y. Nedeleg)	—	8
Ar Brezel e Breiz-Izel (Mari Seite)	—	9
Kantikou ha Kantikerien Breiz-Izel (Loeiz Lok)	—	12
Lennit (Y.-F. ar F.)	—	14
C'hoarzomp c'hoaz	—	15
Keleier	—	16

Korn ar merour : L. Bleunven.

An Tour : Yann Gorrikan.

War golo an niverenn-man eus Kroaz Breiz e weler Dinarz (skeudenn Gilles Boinet, eus Hédé Ill-ha-Gwilen).

PRIZIOU :

An niverenn-man	25	lur	} Gwelit korn ar merour, e trede pajenn ar golo.
Koumanant ordinal	200	lur	
Koumanant a zikour	300	lur	
Koumanant a enor	500	lur	

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de Plomelin, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anolou, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

Micherourien, tiez a genwerz!

grit brud d'ho staliou e Kroaz-Breiz!

Dre Hor Zalver JEZUZ-KRIST

En eun ti bras a genwerz, e Brest, oun bet chomet gwechall en estlamm dirak *dereziou hag a vale!* Dek pe unnek vloaz am boa marteze; aet oan gant va mamm da redek ar staliou e kêr; pignet am boa kals dereziou, ha divesker Yann-varmouz a horjelle gant ar skuizder.

En ti-mañ, dismantret abaoe gant ar brezel, e veze graet aesoc'h d'an dud : c'hoant ho poa da vont betek an eil pe an trede estaj? Deuit dirak an dereziou, lakit ho treid war ar bazenn en em gav dirazoc'h, diwallit da goueza, ... hag, hop! An dereziou, ha nann poan ho tiyesker, a zave ac'hanoc'h, braoik ha tra, betek war laez, Ezomm ebet da zavel eun troad uheloc'h eget egile : en dra ma savec'h, n'ho poa d'ober nemet trugarekaat an ijiner speredek en doa kavet an tu hag ar vadelez da skañvaat evelse skuizder ar brenerien!

Ar c'hristen a zo lakaet ive war an douar-man evit sevel...

Sevel da belec'h? En eul lec'h uhel avat, uheloc'h-uhela zoken, pa distaga e ene diouz karanteziou ar bed-mañ, ha pignat hep ehan, gant hent ar zantelezh etrezek an Tad a zo en neñv... An holl n'int ket graet evit sevel ken uhel : bolontez Doue a verk da bep hini e renk er zantelezh, met holl e tleont degouezout, da eur ar maro, e baradoz an Aotrou Doue, da vev gantañ da virviken : echu eo neuze ar veaj!

Kement-se a zo drest galloud an den

Pa ve roue pe impalaer, pa ve pero'henn da holl deñzorion ar bed-mañ, pa ve karget e spered eus holl ouiziegeziou an douar, ne c'hell ket dont a benn eus ar veaj-se dre e nerz e-unan : Doue n'eo ket eus ment an den, ha ne c'hell ket beza prenet gant kargou na madou, na zoken tizet a-leun gant gouiziegezh spered an den.

Lezet e-unan, an den a zo evel seizet dirak Doue : e-lec'h ma vo lakaet ha ma kouezo, e ranko chom.

Dall eo ive dirak an hent a gas da Zoue, evel eur bugel o c'hoari « mouchig-dall », eun tamm lien gantañ war e zaoulagad : toulbapa a ra, trei ha distrei, o klask tizout unan eus ar c'hoarierien all; aliesoc'h avat e klot e zivreo' war netra eget war unan eus e vignoned ...Dirak Doue, ne c'hellomp nemet toulbapa evelse, en deñvalijenn.

Met evit degas deomp galloud da zavel etrezek unnañ, Doue, an ijiner bras, en deus graet evidomp ive « dereziou hag a vale » : *Hor Zalver Jezuz-Krist!*

An holl heñchou a gas da Rom, a lavarer : da vont betek Doue, n'eus nemet eun hent : ar C'hrist eo!

E-unan en deus heñ lavaret deomp, sklaer :

« Den ne c'hell mont betek an Tad nemet dreizoun-me, emezañ. — Me eo an hent, ar wirionez, ar vuhez » (Yann, XIV-6).

« Me eo sklerijenn ar bed : an hini a vale d'am heul-me, ne vale ket en deñvalijenn, met bez'en devezo sklerijenn ar vuhez » (Yann, VIII-12).

N'eus ket da varc'hata : dre Hor Zalver Jezuz-Krist eo e rankomp tremen, ma fell deomp en em gaout gant hon Tad eus an neñv!

Lakaat a reomp hon treid war an « dereziou a vale » da zeiz hor badiziant : en devez-se, e kemer ar C'hrist ac'hanomp en e garg; rak dont a ra, dre an dour a walc'h an eneou, da zila-ennomp e vuhez a Vab-Doue, gant ar garantez a zoug d'e Dad, e youl da labourat evitañ ha d'e zervicha, e youl da veza gantañ... Evelse emaomp war an hent!



Da c'houde, n'eus d'ober nemet chom unanet gant ar C'hrist e-doug ar veaj : dre e zakramañjou, dreist-holl dre hini ar Bara burzudus, dre an ofereun, e kendalc'ho Jezuz da zegas anaoù-h-mui deomp perz en e vuhez, ha da grefivaat al liamm a stag outañ hon eneoù.

Taolomp evez mat koulskoude : arabat eo koeza war an hent ! Islonk ar pec'hed marvel a jom bepred digor a bep tu d'an hent, ha n'en em lezomp da veza trollet gantañ, gwas-a-ze evidomp ! Ret e vo neuze kregi adarre e traoñ an dereziou : dre an absolvem, degemeret er vat e sakramant ar binijenn, e vozo adarre digoret hon ene da nerz ar C'hrist, hag e teuimp da veza gouest a-nevez da vont gantañ etrezek Doue.

Dorn ha dorn gant ar C'hrist, setu eta lezenn hor buhez evit hon ene : loc'hat da vont gantañ etrezek Doue.

Dorn ha dorn gant ar C'hrist, setu eta lezenn hor buhez evit hon ene : loc'hat gantan war an hent, kenderc'hel gantañ e-doug ar veaj penn-da-benn, hag echui gantañ d'ar vunutenn ziweza, da eur an « tremen » !

Na pebeuz levenez evidomp ! Nag eo bet madeleus en hor c'henver hon Tad hag en deus roet deomp ar Blemer fur, nerzus, leun a sklerijenn, Jezuz, evit hon heñcha betek emañ !

Y. F. ar Falc'hun.

Dalc'hit dieub an 22 a viz eost : ezomm a vo ac'hanoc'h e gouel ar Bleun-Brug, e Kastell-Paol. Eun devez kaer e vo !

PSALMOU ar BINIJENN

51 vet Psalm

« *Miserere mei, Deus, secundum...* »

Doue madeleus, bazit ouzin truez,
Bras eo bet va fec'hed, brasoc'h ho trugarez.
Diouz va fallagriez, penn-da-benn va gwalc'hit;
Diouz stlabez ar pec'hed, va ene dinammit.
Pegement oun kablus, her goût a ran ervat,
Hak bepred, va fec'hed a zev va daoulagad.
Ho lezenn, ganen-me, a zo bet gwall dorret;
Enep d'ec'h-c'houi hepken, eo am eus-me pec'het.
Ar pezh a gavit fall am eus kredet ober,
Hag hen anzañ a ran, evit ma vezo sklêr
Da zaoulagad an holl eo leal ho komzou.
Gwirion ha didamall ho pardedigeziou.
War ar fallagriez ez oun-me diwanet,

Hag e-kreiz ar pec'hed gant va mamm oun ganet.
C'houi a gar, en ene, gwelout ar wirionez :
E goueled va c'halon, lakit down ar furnez.
Gant dour-diwar hysop, skarzit kuit va fec'hed,
Ha gwennoc'h eget ere'h e vezin da welat.
Lakit din va c'halon da dridal gant dudi;
A laouenedigez, roit he gwalc'h dezi;
Ha va eskern, brevet ganeoc'h en ho kounnar,
Ra dafvint adarre, eul levenez dispar.
Trôit ho taoulagad diwar va fec'hejou,
Lakit kuit diwarnoun va fallagrieziou.
Doue, eur galon c'hlan, lakit din e va c'hreiz;
Ha nevezit ennoun eur spered start ha reiz.
Eus gwel ho taoulagad, n'am distaolit ket pell;
Na lamit diganen skor ho spered santel.
Deuit d'am savetel, ma vin laouen bepred;
Dre eur spered nerzus, harpit va dinerzded.

Neuze, d'an dud dizakr, hoc'h henchou me 'zesko,
Ha prim, ar bec'herien ouzoc'h a zistrolo.
Pardoun, o va Zalver, evit ar gwad skuilhet :
Ra c'hellou va zeod embann ho lealded.
Aotrou, me hoc'h asped, deuit da zigeri
Va muzellou din-me, ma c'hellint ho mouli.
N'eo ket eur zakrist digant eur c'hrouadur
A c'hellfe, va Doue, ober deoc'h plijadur :
Hag e lazien tirvi, en enor d'hoc'h ano,
Ne vijec'h ket, moarvat, laouensat ganto.
Va zakrist din-me, 'zo eur spered brevet :
Ar galon glae'haret, c'houi ne zisprijit ket.
Kit a-du gant Sion, hervez ho madelez;
Moger Jeruzalem, savit-hi a-nevez.
Ha neuze e c'hellimp kinnig sakristou :
Degemerout a-reec'h diganeomp her profou;
Ha lor'h a vo ennoe'h o welout an tirvi
War hoc'h no ter bemdez, a-vil-vern otevi.

F. Guivare'h.

Goueliou ar Miz

1 eost : unnekvet sul goude ar Pantekost. — « Neuze e voe degaset da Jezuz eun den bouzar ha mut »... hag Hor Zalver a roas ar pare dezan. Allas, hirio ivez, e keñver ar feiz, nag a dud bouzar ha mut a zo en dro deomp! Ne glevont mui mouez an Aotrou Doue ouz o gervel; ne zavont mui o spered warzu ennañ evit e bedi. — Poaniomp ervat da rei dezo ar pare... ar c'hlevet hag ar prezeg!

6 eost : gwener kenta ar miz : Hor Zalver war an Tabor. — « Per a lavaras da Jezuz : Aotrou, amañ eo brao beza »... Gant Jezuz, ha gant Jezuz hepen, emañ an eurusted hag al levenez gwirion. Sentomp bopred ouz e lezennou, keme-romp skouer diwarnañ, ha deomp alies d'e reseo ouz an daol zantel, d'an nebeuta d'ar gwener kenta eus ar miz. War biou e c'hello-konta evit digoll anezañ diouz fallagriez ar bec'herien, ma n'eo ket warnomp-ni?

8 eost : daouzekvet sul goude ar Pantekost. — « Pion eo va nesa? »... a c'houlennas eun Doktor eus al Lezenn ouz Jezuz; ha Jezuz da respont dezañ dre barabolenn ar Samaritan mat. — Hon nesa eo kement den a zo, ha ret eo deomp e garet a-greiz kalon. Da betra o talvezo deomp dougenn an ano a gristen ma n'omp ket karantezus evel ar C'hrist? An neb a ra vad d'e nesa evel ar Samaritan mat, hennez hepen a vezo degeret mat gant an Aotrou Doue.

9 eost : lun, Sant Yann Vianney, person Ars. — « Lezit eur barrez hep beleg epad ugent vloaz, hag e weloc'h an dud oc'h adori an anevaled »... a lavare ar person santel-ze. Soñjomp ervat er gomz-se, ha diskennomp en hor c'houlenn; n'eus mui awalc'h a veleien, memes en hor bro Vreiz : petra hon eus-ni graet evit rei beleien d'an Iliz? Daoust ha poaniet hon eus dre hor c'homzou, hor pedennou, hon aluzennou, hon oberou evit kaout beleien niverus ha santel? Pegeit 'zo, marteze, n'eus bet beleg ebet en hor familh, hor parrez? Perak? Er familhou hag er parrezioù kristen, e tlefe beza kavet atao beleien niverus.

15 eost : sul : gouel Maria-hanter-eost. — « Pardonit, Aotrou, pec'hejou ho servijerien... ma vimp salvet dre bedennou ar Werc'hez, Mamm ho Mab Jezuz ». Setu aze pedenn an deiz kaer-mañ. — O! Nag a vad a ra deomp soñjal hon eus er baradoz, o pedi evidomp, eur vamm

ken madelezes, ken galloudus ha ken gouiziek! Arabat deomp tremen devez ebet hep he saludi dre eun « Ave, Maria » bennak.

16 eost : lun : Sant Joachim, Sant Arzel. — Sant Joachim eo pried santez Anna, ha tad ar Werc'hez Vari. Pebez enor evitañ beza bet lakaet gant an Aotrou Doue e penn eun tiegez ken santel! Pedomp anezañ evit an holl dadou ha maminoù, ma poanint eveltañ da zere'hel en o zi lezennou an Aotrou Doue.

Sant Arzel a zeus e penn kenta ar c'houlennet kantved eus Bro-Gembre da Vreiz, evit prezeg ar feiz kristen d'hon tud koz. Ar feiz-se a zo deuet a gantved da gantved betek ennomp. Pell diouz he lezel da vervel, bevomp diouti kalonek, ha skignomp anezi en dro deomp ar muia ma c'hellimp. — Kristenten ha Bretoned bepred..., evel hor Sent hag hon tud koz! Sant Arzel, pedit evidomp!

22 eost : pevarzekvet sul goude ar Pantekost : gouel Kalon dinamm Mari. — « Arabat deoc'h en em gata evit ho perañs hag ho tilhad... Sellit ouz laboused an Neri... ouz lili ar parkeier »... Evit kement tra a zell ouz hor buhez pem-deziek, greomp, ha greomp mat, ar pez a zo merket deomp gant bolontez Doue, ha bezomp dinec'h : n'hon dilezo biken... Lakomp ivez hor fisiañs e Kalon dinamm Mari. E Fatima he deus prometet he skoazell da gement bro ha da gement den en em ouestlo dezi. Met taolomp evez mat : en em ouestla d'ar Werc'hez Vari a zo en em lakaat dindan he skoazell evit beva dreist pep tra, e doare gwir-gristenien. Sentidigez ouz lezenn Doue da genta!

29 eost : pemzekvet sul goude ar Pantekost. — « Jezuz a oa o vont d'ouger, anvet Naim... hag en em gasas gant eun den yaouank maro, edo an dud o tougenn d'ar vered... Hag Hen da lavaret : « den yaouank, savé... Ha kerkent an hini maro a zavas... ». Jezuz eo an Doue galloudus a zo mestr war bep tra, war ar maro kouls ha war ar vuhez... Bez' ez eo ivez an Doue madelezes na c'houlenn nemet eun dra : hor mad gwirion evit ar bed-mañ hag evit ar bed all. Atao, hag e pep tra, lakomp ennañ hon holl fisiañs!

AN TAD.

Eur skouer :

Sant Loeiz-Vari a Vontfort

Breiz a zo bet, eur wech muioch, bro ar zent : nevez lakaet eo bet war an aoteriou, gant an Iliz, unan eus he bugale. Breiziz ne anavezont ket kals, evit c'hoaz, buhez o zant nevez, sant Loeiz-Vari a Vontfort. Adalek bremañ e kavint e pep niverenn eus Kroaz Breiz, eur pennadig eus e vuhez, displeget gant eun Tad eus urz ar Vontfortaned, bugale sant Loeiz-Vari : lennet e vo ar pennadou-ze, enijchañs, gant kement a zoujañs hag a garantez m'eus lakaet d'o skriva.



mouez ar bobl, n'eus ket kals anezo hag o defe resevet an enor digant hon Tad santel ar Pab : Sant Loeiz-Vari eo ar c'henta abaoe Sant Erwan! Lorc'h a dle beza ennomp eta o soñjal er Zant, hag eun dever eo evit pep Breizad anaout mat e yulhez.

YAOUANKIZ EUR ZANT

D'an 31 a viz genver 1673 e voe ganet mab hena Yann-Vadezour Grignon, aotrou ar « Bacheleraie » ar « Bois-Marqué », ha Robert de la Vizeule de Launay. Ar bugel, badezet en deiz war-lerc'h e iliz-parrez Montfort, a zougas an ano a Loeiz, astennet gantañ, da zeiz o gonfirmasion, gant ano Mari.

Kaset e voe e magerezh, hervez boaz an amzer, e ti « la mère Aurée », eur vaouez a galon hag a bedenni, a zalc'he tiegez ar Bacheleraie.

Ne ouzer netra all ebet, kouls lavaret, war vloavezioù kenta Loeiz-Vari, betek ma yeas da skolaj Roazon. A vec'h ma 'z eus chomet envor eus eun nebeudig taolennou, talonennou a-briz avat, pa ziskouezont pegen abred e krogas gant hent ar zantelezh.

Tad Loeiz-Vari a oa imorus meurbet, ha pa zave kounnar ennañ, oa gwelloc'h beza pell dioutan; e wreg, daoust dezi da veza eur vaouez dous ha tener, he doe da c'houzañv alies a-gement-se. « Loeiz-Vari n'en doa ket c'hoaz ouspenn pevar pe bemp bloaz, a skriv an tad Picot de Clorivière, pa welas pegent doaniet oa e vamm. Goude ar gvasa barrou-kounnar e teue d'he c'haout, evit he frealzi hag he c'hennerza da zougenn he c'hroaz : ken eutanet oa e gomzou, ha kement dreist e oad, m'oa anat e komze Doue dre e c'henou ».

Meur a wech en doe tro, heu ive, da ziskouez e nerz-kalon dirak e dad. Pa veze re a zafar, e save diouz taol hag e tec'he kuit hep lavaret grik. Gwasa-a-ze evit e bred : ar yun a zegase ar peoc'h en e galon e-unan, hag a zigolle Doue eus pec'hejou — kounnar an tad.

Eur skouer talvoudus a roe evelse d'e vreudour ha d'e c'hoarezed. N'oa ket c'hoaz awalc'h : Loeiz-Vari, troet da

D'an 20 a viz gouere 1947, hon Tad santel ar Pab Pi XII a lakae war roll ar zent eur misioner a zo meneg anezañ hirio dre ar bed holl : sant Loeiz-Vari a Vontfort.

Koulskoude, ma 'z eo brudet en hor c'horn-bro, e vuhez, e vertuzioù, e oberou n'int ket gwall anavezet. Sant Loeiz ne daol c'hoaz, kouls lavaret, nemot e skleur war Vreiz-Izel.

Ganet e Breiz-uhel, demdost da Roazon, n'eo ket deuet da labourat e Broiz larkoc'h eget Sant-Brieg : poaniet en deus dreist-holl war an dachenn en em led etre Rouen, Paris, Poitiers hag ar Roc'hell.

Breizad eo avat dre vro e gavell, hag ive dre e dro-spered, e hardisegez, e nerz-kalon, e feiz divrall. E vro, a lavare unan bennak, « eo hini an dud pennek hag ar galonou sentus, hini an dud ne reont ket a van ouz rebechoù ar re all pa heuliant o c'houlenniañs... » Setu aze, e gwirionez, poltred an Tad Montfort.

Ouspenn-ze, mar deo hor bro « douar ar Zent koz » lakaet war an aoteriou gant

7

An Aotrou 'n Eskob DUPARC (1857-1946)

En o c'houk edo « Feiz ha Breiz » hag « Ar Vuhez Kristen », ne oant ket dihunet c'hoaz dindan liou « Kroaz Breiz », pa voe galvet da vont dirak Doue an Eskob doujet ha karet en doa gouarnet, epad 38 vloaz, eskopti Kemper ha Leon. Eun dever eo deomp eta, eur blijadur e vo d'hol lennerien, taoler eur zell war e vuhez hag e oberou.

BLEUN E YOUANKIZ

Evel Brizeug, ar « barz bleo melen », an Aotrou 'n Eskob Duparc a-zo « Breizad dre e ouenn, Oriantad dre e gavel, parrezriad Sant-Loeiz dre e vadiziant ». Dont a reas er bed en Oriant, d'ar 6 a viz c'hovevrer 1857, hag ar c'hrouadur a voe roet dezani an anioù hon eus lennet ken alies : *Adolf-Erwan-Mari*.

Tad an Aotrou Duparc a gavas re dreut pacamant an arsanailh evit maga o diegez hag a zistras da Bont-Skorv da zere'hel eun ti-bouloñjerez (1). Deuet koz dija, an Eskob a domne e galon o tigas soñj eus labour dibaouez an tad-se, a c'houmoze, o werza bara leal ha mare'had mat, boued e diegez niverus. Ar paotrig a voe ivez, en e vloaveziou kenta, merket doun en o spered hag en o galon gant feiz kreñv ha devosion dener e vamm. Gwir eo he doa ar familh douget testenit evit ar feiz epad an Dispac'h bras : tri contr koz (daou anezo anvet ive Duparc) a oa c'hommet hep plega d'al lezennou a glaskas dispartia liiz Bro-C'hall diouz Rom.

A-vec'h m'en doa Adolf Duparc echu e nao bloaz, e voe dibabet, etouez ar vugale bodet niverus gant ar Person e keur an iliz-parrez, gant Renner Kloerdi bihan Santez-Anna Wened, deuet da Bont-Skorv da brezeg eur retred. An aotrou Person, a-du gant Renner ar C'hloerdi bihan, a ginnigas d'ar gerent kas ar paotr d'ober e studi e skeud chapel Mamm goz ar Vretoned. Hir awalc'h e vevas ar Renner-ze, an ao. Kerdaffrec, eur C'hernevad eus Gourin, evit gwelout frouez e labour kurunet gant Providañs Doue : ne varvas nemet er bloavezh 09, oajet a 82 vloaz.

ER C'HLOERDI BIHAN

E Santez Anna, epad 8 vloaz, an deskard bihan, ar c'hremard, ar paotr yaouank a ziskouezas dioustu, ousspenn talvoudegezh e spered digor hag e garantez ouz al labour, donezonou kaera e galon : dous hag hegarat, troet, da welet an tu mat en dud hag en traou, dilorc'h ha sentus. Kavout a raed ennañ war eun dro an **douster** a denne eus kostez e vamm hag an nerz a zeute dezani a-berz e dad. Hag e lavared dija : Hennezh a zo merket gant dorn Doue...

E studi a voe dispar. Ne oa ket gwall droet, mar kirit, war ar c'hifrou, ar « mathématiques », ha gwir eo n'en deus

morso gouezet konta, odou e vuhez a veleg hag a eskob, pa gave dirazani eur paour pe eun oberenn vat. Met e spered a oa lemm kenañ, e vemor burzudus, e zoare da zisplega helavar ha plijus. Ne ket sonezus eta gwelet e studi er C'hloerdi bihan klotet gant ar vache-louric'h.

ER C'HLOERDI BRAS

E miz here 1874, ar paotr yaouank a voe digemeret e Kloerdi bras Gwened. Eno, « pell diouz an trouz hag holl safar ar bed », e c'hellas soñjal dounoc'h en e c'halvidigezh, e bolontez Doue warnañ, digeri e spered o studia a-zevri kelerindurezh an Iliz, ha kaeraat c'hoaz e ene hag e galon. Ha pa zeuas ar mare da veza graet abostoler, eo'h en em roas d'ar Mestr evit atao, en eur grena marteze met dreist-holl gant karantezh ha fizianñ e gras Doue.

KELENNER E SANTEZ-ANNA

Re yaouank evit beza beleget dioustu en eur echui e studi er C'hloerdi, an Aotrou Duparc a voe gouennet gant e vistri eus Santez-Anna hag a grogas hep dale gant anicher denn ar c'helenner.

D'ar c'horaiz 1880, a-vec'h echu gantañ e dri bloaz war 'n ugent, e voe graet beleg da vilken, lakaet etre an neñv hag an douar, etre an Aotrou Doue hag an dud, fiziet ennañ galloud Jezuz-Krist e-unan.

Egiz kelenner, an aotrou Duparc a voe karget da genta eus ar skol **religion**. Bez' e rankas, evit ranna d'e ziskibien yaouank bara ar wirionezh, studia ez-nevez an doueonezh (1) en doa desket er c'hloerdi bras. Labourat start a rae, eur blijadur oa e zelaou, met ret-mat oa da bep hini beza gouest, e penn kenta eur gentel, da renta kont eus ar gentel araok : ne oa ket, da farsal na da gredi e oa ar skol religion eun tammig war ar mare'had.

(Da gendrec'hel).

P. Y. NEDELEG.

(1) Anioù ar skiañchou e brezoneg a vez kavet o lakaat an dibenn « *oniez* » da heul ar pezh a ra danvez eur skiant pe skiant. Evelse, « doueonezh » a dalv ar galleg « *théologie* », skiant an Aotrou Doue « doueonezh » a dalv « *géographie* »...

Ar Brezel e Breiz-Izel

AR PEZ A C'HOARVEZAS E KLEDER D'AR 6 A VIZ EOST 1944

GANT MARI SEITE

Kendalc'h ha diwez

An Alamaned, en hent war-zu Brest, d'ar mare ma tigouez an Amerika-ned er vro, a lak ar pil hag al laz dre barrez Kleder : tiegeziou a-bez disman-tret, eostou devet, tud lazet pe vac'kagnet gant soudarded pennfollet ha kounnaret. -Mari Seite, bet gloazet he-unan, a gont ar pezh he deus gwelet ha klevet en devezioù -ze, leun a drubuilhou (Gwelit Kroaz Breiz, mae, p. 16, mezveven, p.)

Mari, e wreg, hag Ivona e verc'h, a ouele dourek. O daerou avat a rae poan d'ezañ... Hag e c'houlenne outo, ehana da ouela dirazani, rak kement-se a rae drouk d'ezañ muloc'h c'hoaz.

Ken dinerz en em gava, ma kave dezani edo o vont da vervel. Santout a rae e galon o fallaat.

Neuze Ivona a redas etrezek ar bourg evit lavarout d'ar medisin hasta buan.

Daou all a yeas da Verven da glask eur medisin all.

E-keit-se an tan bet enaouet e kalkuad ar Feunteun-Veur-Vras, a strake gwasoc'h gwas ; ar voged a zouc betek ennomp. Den avat, na grede mont da laza an tan-gwall, rak an tennou a strake atao war-zu ar bourg'h N'oa netra da ober, nemet gedal ma vije sioulaet an traou.

An heol a skoe warnomp bremañ o vannou bero ; disheol ebet n'hor boa. An amzer a veze kavet hir. Neouiemp ket pet eur e oa, zoken.

Met, etu eun trouz bennek o tont er vanell a zigas d'ar park leton.

Kelou burzudus !...

Eun oto !... o tont eus Berven !... da gerc'hat ar re c'hloazot.

Ar paour kaez If avoe lakaet a-nevez war ar c'hravas. Kalz poan a ziwaske ; an distera ma veze loc'het e laoske youc'hadennou ; meur a wech adarre o vennas simpla. Er fin e voe gellet e lakaat en oto. An tri c'hloazet all : v azad, Maodez hag an If Kombot, a gemeras bep a blas en e gichen, ha buan etrezek Berven, N'oa ket emzer da goll.

Sioulaet breman an traou, Tenn ebet ken. Va mam hag ar re all a yeas war-du ar gêr. Holl dud ar Feunteun-Veur ha tud all deuet eus Lanneufeld a da laza an tan e kalkuad ar C'hombot.

Me a yeas etrezek Lessaou-Vihan, rak lavaret en doa din ar medisin arabat bale kalz.

Setu ar c'heleier spontus a glevise eno : Renan Roue, Loeiz an Du, Yann Roue, Herve Elard, Saig Thepot, eus Toull-Broud, bet kemeret er mintin e-giz « otaj » a zo bet fuzuliet, du-hont pelloc'h eget ti-skol ar Frered. Unan eus ar Frered, an aotrou ar Borgn, a zo bet lazeta ivez. Frafisiz ha Viktor, am boa gwelet diframma eus ti ar medisin, a zo bet lazeta e-kichen Pont-Karadeg. Josef Falc'hun, eur martolod koz eus Kreac'h-Avel a zo bet diskaret endra m'edo o klask laza an tan en eur bern-koad.

Pebez strafuilh ! Pebez kañv !...

Ha ne oa ket echu !

An Alamaned o tremen dirak Kroaz-ar-Bandu, a yeas, eur vandennad anezo, e-barz an ti. Ar wazed a oa aet da guzat, a drugare Doua.

Ar vamm, avat, a oa en ti, oc'h ober he labour. Goulenn rejont a meur a dra da zebri. Met unan bennak anezo, poulzet gant e youlou fall moarvat, a yeas da glask afer ouz ar paourkaez maouez. Houmañ, spontet holl, a c'halvas he mab hena :

— Jambar ! Jambar !... Deus buan war va sikour, en an' Douc, pe e vezin lazeta.

Jambar da genta ne grede ket loc'h.

Met ar vamm baour a youc'he gwasoc'h-gwas, cun druez he c'hlevet.

Skoet gant he youc'hadennou. Jambar a'hellas ket padout pelloc'h en e doull kuz. Lamat a reas da zifenn e vamm.

Allaz ! avat, paourkaez Jambar !

Kemeret evit eun « terrorist », ar zoudarded a zailhas warnañ evel bleizi. Kaset e voe dirak an drav, er porz, da gaout cun ofiser, a c'houlennas outañ :

— Vous terroriste ?

Toui a reas ne oa ket.

Den n'her c'hredas.

O welout e oa echu gantañ. Jambar en em daol war e zaoulin da c'houlenn truez digant an ofiser.

Truez ebet ne voe.

Kemenn a reas hemañ d'e zoudarded tenna.

Al leur a dregernas hag ar paourkaez paotr yaouank a ruilhas war an douar beuzet en e wad.

Eur zell en devoe graet ouz an Neñv, evel eur zell da c'houlenn pardon.

Hag edo bremañ astennet war an traez, gwenn, a ruzie gant e wad. Gwad eur mab, a gavas e varo o klask difenn e vamm ! Eur maro spontus... met eur maro kaer evelato.

Ar vamm a voe lazeta ivez. Diwezatoc'h e voe kavet he c'horf paour, er park, e-kreiz eur zammenn winiz.

Skrija 'ra eun den o skriva kemend-all ! hag e chom dilavar, mut, hep gallout kompren penaos ha perak e c'helle an den beza ken fall evit an den.

Goude ma voe sioulaet pep tra, hag act ar zoudarded gant o hent, o teuas ar medisn, hag eur beleg da gerc'hat ar c'horfou maro, D'ar chapel e voent kaset da zebelia...

Ne veze klevet nemet keleier trist.

E Kerisur e oa bet lakaet an tan el lojamant a-bez. Devet e voe pep tra, ha netra ne voe savetact eus traou an ti, nag an arrebeur, nag an dilhad, nag an arc'hant.

Ar vamm a oa bet lakaet ouz ar voger da laza. Hep gouzout parak, dre vuzud hag a-greiz holl, e voe lavaret d'ez :
— Raoust ! Raoust !

Hag e tec'has gant he buhez.

E Leslaou-Vihan eo e klevis an holl geleier-ze.

An noz a oa bremañ kroget da astenn he mantell ganv war gativou an dud.

Trouz ebet mui dre holl, nemet sioulder ar maro war an dachenn a vrezel goude an emgann.

Den, war 'n hed tost d'ar bourg, ne gredas chom en e di da dremen an noz.

Job, Annaig ha Per Kerne a yeas d'an Dourell. Liz a jomas gant tud Feunteun-Veur, er-maez, e-korn ar park leton, dindan bolz steredennet an Neñv.

Va mamm ha me a dremenas an noz e Leslaou-Vihan.

Ar spont eus ar pezh a oa c'hoarvezet e-doug an deiz, am dalc'has dihun ; va gouliou ivez a rae eun tammig poan din.

Ne gouskis ket eur berad.

Mall am boa da welet an deiz o c'houlaoi.

War-dro pemp eur, e kave din beza klevet trouz ankenius eur vindrai-lherez.

Buan e c'halvis ar re all.

Prim e savis ; dilhad hag all e oan em gwele, pe gentoc'h war eur bailhasenn, astennet war leurenn ar zolier.

Strafullhet, an holl a reas eveladoun.

A drugare Doue, trouz ebet dre holl ! Dijuni a voe debret, ha gortoz a rejomp, sioulk, goulaouig an deiz.

Pa voe gwelet adarre lagad an heol o para, ez ejomp war-zu an Ogellou da labourat war-dro an dismantrou : ar gazeg varo a oa zouara, ar vioc'h hag al leue bihan da zispenn, ar c'hig anezo da warza. Louis ar C'hastell Dero eo a zeuas evit kement-se. Holl wazed Leslaou a roas ivez an dourn, gant tonton Per an Dourell hag Anna.

Bennoz Doue d'an holl dud vat-se. Eur skoazell int bet evidomp da c'houzañv, hep fallagoni, brasa anken hor buhez, hag eur frealz e-kreiz hon trubuilhou garo.


Goude an derveziou ankenius-se, ar vuhez a yeas adarre endra.

Da c'hedal me vefe savet eur varrakenn e rankemp bemdez mont da glask lojeiz e ti pe di evel ar glaskerien vara. E ti Job Jak, er bourg eo e kemp bremañ repu evit an noz. Morse n'hellimp trugarekaat a-walc'h ar familh gristen-mañ hag he deus gouezet, ken brao, balzami hor c'halomou rannet ; Evit kement all a garantez kristen, ra vezint digollet kaef, eun deiz, e Baradoz an Actrou Doue.

A-benn ar 16 d'an nez o voe savet deomp hon ti nevez, ma c'heller da vihana rei an ano-ze d'eur varrakenn bet freuzet ha difreuzet dija n'ouzoun ket pet kwech ; eur varrakenn diskloz a-walc'h, savet diwar herr. El lloz, a-hed kleuz ar park hir eo e voe savet ar varrakenn-ze. Eno da vihana, hor bezo eun doenn hag eur c'houdorenn deomp hon unan. Kaer 'zo, gwelloc'h ec'h en em gaver atao er gêr, hag e vefe ar gêr-ze eur c'hoz barrakenn fall, eget e ti ar re all, n'eus fors pegen karantezus e vefent.

M. S.

DIWEZ



Kantikou ha kantikerien Breiz-Izel

Kendalc'h  Gant Loeiz Lok

Kantikou ha kantikerien Breiz-Izel, (kendalc'h) gant Loeiz Lok.

Bez' ez eus eur c'hantiker brezonek ken brudet hag an Tad Maner; anavezetoc'h eo zoken, rak rouez eo ar Vretoned ha n'o dije ket bet etre o daouarn unan pe unan eus levrioù an Aotrou **BRIS**, an Heuriou da vihana.

Ouspenn daou-c'hant kantik en deus savet an Aotrou Bris. Moulet int bet e « *Pedennou hag Instructionnou christen* » (1695), e « *Canticou spirituel var an oll exercicou eus eur guir gristen* » (1698), hag e « *Canticou spirituel var guement se requis ha necesser da ur c'hriston evit e silvidigez* » (1702).

An Heuriou a zo tennet, war bouez eun tamm astenn, eus danvez an daou levr diweza-mañ.

Kantikou all a zo c'hoaz en oberou-mañ eus an Ao.Bris : « *Reglant a vuez* » (1699), « *Ar Boguet eus ar Mission hag eus ar Retret* » (1710), « *An exercicou spirituel eus ar vuez kristen* » (1712), « *An Orolach* » (1725).

Brezonég an Tad Maner a oa gwisket e galleg. An nep a oar galleg hag eun nebeud brezonég a c'hell entent brezonég an Aotrou Bris.

Kals eus e gantikou a zo barzoniez troet diwar al latin : pedennou, psalmou hag all.

Seiz eus kantikou an Ao.Bris a gaver e levr kantikou hon Eskobti, en deiz hirio.

En amzer an Tad Maner hag an Ao. Charles Bris e oa c'hoaz kantikerien all : an Tad *Bernard ar Spered-Santel*, eus urz Karmez, gimidik a Lesneven, hag en deus savet « *Doctrinal ar C'hristenien* » (1646); an Tad Kabusin *Bernard a Lannou*, aozet ar « *C'honferansen santel* » (1692).

N'emañ ket o anioù en hol levr kantikou.

Ha pet ano all a vank! 50 kantik a zo el levr ha ne ouzer ket gant piou int bet savet. Ouspenn-ze, kals eus ar c'hantikou a zo bet kempennet ken alies ma ne c'heller mui kaout ar penn kenta anezo.

Oberou all c'hoaz a zo chomet divoul betek-hen, evel dorn-skrid an Ao. **Per BARISY**, person Inguiniel, e eskobti Gwened. E zorn-skrid, miret e levr di

Kemper, a zo anvet : « *Cantiqueu spirituel ar deveriou ar c'hristen* » (1710). Emañ e kaver ar c'hantik : « *Allas, ne oufe den kompren* », nemet eo bet cheñchet mat e stumm abaoe.

Kaout a reer ivez kantikou all ha ne c'heller ket lavaret, difazi, gant piou int bet savet. An Tad Kabusin **GREGOR a ROSTREN**, yezadur ha geriadur brezonek, eo en deiz savet, hervez an Ao. Kerdaet : « *An exercicou spirituel eus ar vuez kristen evit ar Mission* » (1712), eul levr rouez kenañ, ker rouez ma n'hon eus ket e gavet da studia.

Ha setu perak ne gaver ket bremañ en hor c'hantikou an Gregor a Rostren, daoust n'emañ eus Exerisou ar c'hantik : « *Diskennomp holl, kristenien, en iferiu da welet* ».

Oberou kollet ar mouladurioù kenta anezo, oberou hep ano an azerien? E kement eskobti eo bet c'hoarvezet kement all.

E Bro-Wened, o oa, a ouzomp, ik XVII^{et} kantved, eul levr kantikou savet gant daou Dad-Karin eus krou eñchoù Alre hag Henbont, rak Pe Barisy a skriv en e zorn-skrid en deus tennet 26 ton brezonek diouto.

Ha koulskoude, n'eus ket keit-se abaoe : 300 vloaz da hirra! Re a dud a ra fae war ar paperioù koz : n'o c'havont mat nemet d'ober tan pe da werza d'ar c'herne. Mat eo koulskoude kaout soñj eus ar re o deus, a-hed ar c'hantvejoù, miret ar brezonég ha labourer gantañ!

Da skouer, piou a lavaro ano an hini a zavas ar « *Guerzennoù santel* » (1734?).

Evit gwir ive, mieskañ a zo bet graet el levrioù kantikou : ar kantikerien a zave o levrioù diwar goust kantikerien o eskobtioù ha re an eskobtioù all hep lavaret eus a belec'h e teue an eienenn. — Evelse eo bet savet, diwar goust oberou an Tad Maner al levr : « *Cantiqueu spirituel, pe guerzennoù devot ha forhpourfital* » (1760), lezet dizano. N'oant, e gwirionez, nemet oberou an Tad Maner, roet dezo eur zae wenedek.

Unan eus al levrioù bet moulet an alies eo ar « *C'hanticou spirituel, compo-set evit usach ar missionou* » (1784). En o zouez e kaver kals kantikou savet gant an aotrou Guillaume **LE JEUNE**, person Plougoulm (1735-1807). E kenver ar brezonég avat, n'eur ket disteroc'h moarvat. — En hor c'hantikou bremañ,

n'eus nemet unan eus re Le Jeune, ha c'hoaz eo bet ret e gempenn kement ma ne anavezfe ket an Ao. Le Jeune... e vab!

Tri eus hor c'hantikou a zo bet keme- ret e-touez oberou an aotrou **POUR-CHASSE**. Hemañ en doa dastumet kantikou koz, aozet re nevez, lakaet e brezonég kals a re c'hallek, en e levr « *Choess a gannennou spirituel azeid er retraed* » (1792).

Unan all a zo tennet eus ar renkennad a 16 kantik a gaver en « *Hent ar baradoz* » (1805), savet gant an aotrou Alan **DUMOULIN** (1747-1811).

Rouez eo an dastumadennou kantikou ha ne vije ket bet tennet eur c'hantik bennak anezo da veza lakaet el levr a implijomp hirio : an dra-ze a zo c'hoar- vezet koulskoude gant ar « *C'houlennou hag ar respouchoù an importanta eus ar c'hatekis nevez lequeat e guers brezonneg gant M. Kleroc, person Kameled* » (1810). Katekis nevez : da lavaret eo an deveriou e-keñver Napoleon. Eur wech diskaret an Impalaer, diskaret ive ar c'hatekis ha kantikou an aotrou Clerec. — N'eo ket eur c'holl, nag evit ar c'hantikou nag evit ar brezonég!

Muioc'h a zudi hag a zanvez a gaver e « *Pratiquen devot ha Meditationen* » (1825) an aotrou **NOURRY** (1743-1804), person Bignan, ha goudeze person Ilizveur Gwened. Eus al levr-ze eo tennet ar c'hantik : « *O, nag hir eo an noz!* ».

Arabat beza souezet o kaout meneg da ober alies eus Gwenediz, pa skriver istor hor c'hantikou brezonek. Tuet int muioc'h da gana, ha gwelloc'h e kanont, war a leverer, eget Leoniz da vihana. Niverusoc'h eo ive o dastumadennou kantikou; setu eur roll anezo : « *Canennou spirituel azeit peden, maelelin, ytru-recatt* » (1779), savet gant *Pourchasse*, a greder; « *Guerzennoù santel* » gant an tonioù, savet gant *M. Sanson* (1736-1811); « *Guerzennoù eid escobty Gwened* » (1857), gant *J. Guilloù* (1797-1857); « *Canennou neve* » an aotrou *Quillere* (1802-1858); « *Canennou* » an aotrou *Deat* (1797-1862); « *Canennou tonioù an aotrou Mouel* » (1800-1875), eur muziker

anezañ, hag a zavas tonioù evit ouspenn daou c'hant kantik hag hanter-kant. — An Tad *Larboulette* (1805-1892), jezuist, a reas e 1856 eul levr kantikou : « *Guerzennoù eid el er blai* », kals anezo eus e zorn e-unan. — Eur beraiad kantikou a zo bet graet ive gant Mgr *Le Joubiou* (1806-1888).

Ha c'hoaz ne rōomp aze nemet anioù ar kantikerien vrudeta.

Bro-Dreger a oa brudetoc'h evit he c'hoariva (théâtre) : nebeut a levrioù kantikou a voe moulet er rann-vro-ze araok 1830.

(Da gendere'hel).

Penaos beza kemeret evit eun impalaer.

Setu amañ petra gontet e buhez an Impalaer Frañsez-Jozef, diweza impalaer Austria (Autriche) (1830-1916).

Eun devez ez eas da jaseal gant Roue ar Saks ha Dug-meur an Toskan : koll a rajont o hent... Goude kals troioù ha didroioù e kavjont eul labourer-douar en doe ar vadelez d'o c'has d'ar vourc'h tosta en e wetur.

Dre m'oant gwisket e chaseourien, n'oa ano ebet gant ar c'houeriad d'o anaout.

Degouezet er vourc'h, an Impalaer, araok kuitaat ar c'houeriad, a lavaras dezañ : « *Gouzout a rez piou a zo dirazout?... Me eo an Impalaer Frañsez-Jozef, ha setu amañ Roue ar Saks ha Dug-meur an Toskan* ».

Ar c'houeriad, gant eur mouse'hoarz goapaus, a respontas : « *Laouen ou'n ober anaoudegez ganeoc'h! Me eo Impalaer Bro-Sina (Chine)* ».

Antronoz, pa zavas kaoz er vourc'h eus an Impalaer hag e vignoned, ana- vezet gant lod eus an dud, ar c'houeriad a jomas diskredik : « *Penaos, emezan, e vije gwir ar pez a livirit? N'o deus ket roet zoken eun tamm gwerz-butun din!* »

Arzel GERVORVAN.

Eur micherour padus.

E diabarz pep hini ac'hanomp ez eus eul labourer ha ne espern ket e boan : hor c'halon eo!

En em zastum a ra wardro 75 gwech dre vumutenn, evit bec'hia ar gwad da redek er gwaziad. — Dre al labour-ze, e tispign bemdez an nerz a zo ret d'eun darbarer evit sevel 2000 lur vein, a-bouez e zivrec'h, war eur voger a 18 metr-uhelder!

Piou vo souezet ma teu ar servicher kalonek-se da skuiza dre hir amzer ha ma ne c'hell ket padout atao?

Kentel da dud sporeded ar C'hornog.

Evit gouzout lenn ar sinaeg (Chinois), e ranker anaout 40.000 lizerenn!

Peadra da jom er skol eur pennad mat, a c'heller kredi. Pa weler nag a boan a rankomp kemer evit deski doareoù ar 25 lizerenn a implijomp e yezoù ar C'hornog!

Lennit

ALAIN DE CORNOUAILLE : PENHOAD (Spes, Paris 1947, 442 pages).
GWENNAEL (aotrou Cozannet) : KLOTENNOU BREZONNEK, (1948). — (Her
goulenn digant M. l'abbé Luguern, directeur de l'Ecole Saint-Joseph, Plabennec
(Finistère).

E gwerz e ti : « Ar Vuhez Kristen », Couvent des Capucins, Roscoff (Finistère)
C. C. 209-81 Nantes

(ar mizou-kas a zo ouspenn ar priz merket)

Buhez Hor Salver Jezuz-Krist, gant an Ao. Uguen hag an T. Eujen.....	300 l.
Ar Were'hez Vari, gant an Tad Medard.....	100 l.
Fatima, gant an Tad Medard.....	100 l.
Sant Fransez a Aziz, gant L. Inizan, kresket gant an T. Eujen.....	200 l.
Bleunioù Sant Fransez (Florett).....	100 l.
Buhez skeudennet Sant Fransez, gant an T. Eujen.....	80 l.
Sant Fransez, mignon ar vugale, gant Breur Melar.....	60 l.
Ar-grasou pe ar pedennou dirak ar re varo, gant y ar Go.....	100 l.
Prezegennou war Drede-Urz S. Fransez (2 leor), gant an T. Eujen.....	60 l.
Santez Elizabeth a Hongri, gant an T. Eujen.....	15 l.
An oferenn displeget gant skeudennou, gant an T. Eujen.....	20 l.
Levrig-dorn Trede-Urz S. Fransez, gant an T. Eujen.....	30 l.
Diwar e'hoarzin, gant an T. Medard.....	100 l.

Ar prizioù merket amañ ne dalvezont nemet bremañ : kemmet a c'hellont beza gant priz ar vuhez.

Degaset da Groaz Breiz :

R. D. de Sechelles : Chateaubriand et l'âme celtic.

In 8-couronne, 224 pages, 220 francs.

Her goulenn e ti Armand Prud'homme, 12, rue Poulain-Corbion, Saint-Brieuc.

pe : Office Breton du Livre, 18, rue Saint-Gouéno, Saint-Brieuc.

pe : Librairie celtique, 108 bis, rue de Rennes, Paris (VI^e).

Al levr-mañ a zo skrivet evit ar c'hantvet bloaz goude maro ar skrivagner brudet Chateaubriand,
ganet e Sant-Malo e 1768 ha marvet e Paris e 1848.

An oberour a daol eur sklerijenn nevez war skridoù niverus Chateaubriand en eur zisplega pegement
eo dleour d'e orin keltiek : e vuhez zoken, e dro-spered, e zoareoù da varn ar bed ha da zellet ouz ar
groundelez, e gredennoù koulz e keñver ar feiz kristen eget ar bolitikez, pop tra a zo livet gant ar
skrivagner a oa Breizad eus Hanternoz-Breiz, ha dre-ze muioù enkrezet, garo zoken e wechou, daoust
m'eo skedus peurliesha diwar e'horro.

Marteze e vo tamallet eun tamm bennak an Ao. de Sechelles da veza gwelet ar C'helt hopken e
Chateaubriand : da vihana, danvez al levr a respont mat d'e ano, ha gantañ e vo aesoc'h hiviziken
displega labourou ar skrivagner.

Kelaouennou.

SKED:

(J. Morin, 7, rue des Chantiers, Paris V^e) : kelaouenn ar Geltaed yaouank kristen. — En
niverenn 4, eur studiadenñ a bouez, gant P. Keraod : Scoutisme et langue bretonne.

Al Liamm.

niv. 9., 90 pajenn. — Kelaouenn lennegel an Emzav breizek : kaout a reer enni studiadennoù
a bep doare diwarbenn buhez ar spered, (P. Le Bihan, 6, rue du Maréchal-Joffre, Versailles, S.-et-O.).

Le Peuple breton.

niv. 9., 32 pajenn : « politique, social, économique, culturel, international ». —
J. Martray, 23, rue Carnot, Villetaneuse (Seine).

An Aimsir Celtaic.

(An amzer keltiek), kelaouenn a liamm etre an holl Geltaed, eus Breiz-Veur, bro-Elre,
ha Breiz-Izel. (An aimsir Cheilteach, Sraid an Duin, Uorçaigh).

C'HOARZOMP C'HOAZ


Respontou evit c'hoariou miz gouere.

Divinadennoù :

1. C'houi hoc'h-unan ! — 2. Ar si-
minal. — 3. Eun toull ! — 4. An troad.
Diskoulm gerioù kroaz al Lagad-du
(niv. 1).

1	K	A	N	A	B
2	A	O	T	R	E
3	N	T		G	O
4	I	R	V	I	
5	R	O	L	L	A
6	I	U		A	L

(Ano gounider ar genstrivadeg a
vezo roet e niverenn da-zont Kroaz
Breiz).



Divinadennoù.

1. — Genou digoret,
Diskoulm hep klavet,
Kav hep bouzellou,
Treid hep ivinou :
Petra eo ?
2. — Penaos eo heñvel eur bragou toull
hag eun paour o c'houlenn
aluzenn ?

Kenstrivadeg. — (Gwelit e niverenn Kroaz Breiz miz gouere) :

Gerioù-kroaz al Lagad-du.

	1	2	3	4	5	6	7	8
1								
2								
3								
4								
5								
6								
7								
8								

A-blaen :

1. — Eul lec'h brao evit c'hoari.
2. — Amzer eur c'hoari.
3. — Ano eur manac'h bras.
4. — A verk al liester (pluriel) en anioù-
traou.
Goure'hemenn d'an toer.
Tri farz eus seul.
5. — Hanternoz Bro-Iwerzon.
Tri farz eus seul.
6. — Renkou.
7. — Liester azen. — En dro d'ar park.
8. — Loened flemmus.

A-zerz.

1. — Den hag a labour.
2. — Kazeg vihan.
3. — A ro gor. — Loen diot, dreist-höll
pa vez kornek.
4. — Toull er c'hae. — Mere'h Jakob.
5. — Lean kemmesket.
6. — A vez lakaet dirak eeun. — A blij
d'ar vugale.
7. — Diou gensonenn (consonnes). —
Evañ ar Zaozon. — Eus ar verb
mont.
8. — Pesked hag a zo pinvidigez Konk-
Kerne.

KELEIER

Gouel kant-vloaz ganedigez ar barz Frederig ar Gwiader. Dre levezon « Unvaniez Arvor », hag a-unan gant Ao.Maer ha Kuzulierien Braz-parz, e vezo graet er ger-mañ, d'an 12 a viz gwengolo 1948, eur gouel en eñvor da Frederig ar Gwiader, ar barz brudet, a voe ganet e Braz-parz d'ar 17 a viz meurzh 1847.

Anavezet eo al labour savet gant ar barz, kouls er c'hoariva eget er varzoniez, dreist-holl « La chanson du cidre », ha « L'ère bretonne ».

Eun daolenn-eñvor a vo staget ouz an ti ma voe ganet ennañ Ar Gwiader.

Gouelioù, bodadegoù-lennege, displegadennou ha beajou a gargo an tri devez eñvor : an 12, 13 ha 14 a viz gwengolo.

Eur strollad tud eus Brazparz a zo savet evit aoza ar gouel. Strolladoù a enor hag a baeroniez a zo war ar stern. Eur roll a zo digor ivez da zegemer profou.

Evit an holl c'houlennou, skriva da « Unvaniez Arvor », 21, rue Saint-Louis, à Vitre (L.-et-V.). An arc'hant a c'hell beza kaset da :

Jean Cholcan, à Vitre. C. C. P. 5852, Rennes.
Georges Tattevin, à Rennes. C. C. P. 25-12, Rennes.

Maurice Le Dault, à Quimper. C. C. P. 111-78, Nantes.

Gabriel Le Moal, à Nantes. C. C. P. 445-79, Nantes.

Merka, mar plij, evit petra e kaser an arc'hant.

DOL-VREIZ 25-26 gouere.

Dacu zevéz gouel a zo bet graet en eñvor eus ar Roue Nomenoe, a voe kurunet, unnek-kant vloaz a zo, er bloaz 848, e kêr-Dol.

Nomenoe eo kenta Roue Vreiz : brudet eo dre an trec'h meur a c'houezas e Ballon, e 845, war an Impalaer Charlez-ar-Moal; nebeut araok, e 844, en doa kaset brud armeoù Vreiz betek an Anjou ha zoken ar Poitou.

Heñ eo a zavas rouantelezh Vreiz, hag a zegasas enni ar peoc'h hag an unvaniez, warlerc'h an dismantrou berniet betek neuze dre vrezelioù diniver. « Tad ar Vro », setu an ano a vèze roet gwechall da Nomenoe gant ar Vretoned.

Ar gouelioù-mañ a zo bet savet evit tenna ar Roue bras eus an deñvalijenn e-lec'h m'oa krouezet dre ma ne anavezet ket avalec'h istor Vreiz a wechall.

Aozet int bet gant eur strollad a oa ennañ : R. Th. Salaun, Y. P. d'Harskoet, G. B. Kerverziou, C. Goaziou, R. Klec'h.

AL LOUARN HAG C'HAZ

Moutig ha Lanig

Evel daou zantig

A yeas da bardona :

Daou lampon o vont da batera !...

Kuit da baea o loj, o bevañs,

E chaokent yer saourus

Dre m'o deveze chañs.

An hent a oa hirr, inouus ;

Hag evit e verraat

E stagjont da zinkanat :

'Tre m'en em drabaser

E kaver berr an amzer.

Hon daou zantig a gomzas, a huchas,
Ken e kouezjont mut pe dost. Siouaz !
Evit drouk-prezeg eus an nesa

Pep hini a gavas e vouez genta.

Erfin Lanig a lavar da Voutig :

« War da veno out ampart d'ober da

[Voumounig ?

« Kement ha me ?

« Bez'em eus em zac'h ouspenn

[kant tro !...

— « Nann, eme Voutig, n'oun ket par

[d'it-te !

« Em zac'h n'em eus nemet eun dro,

« Met d'am zofij e talvez mil !...

Hag adarre tabut, o daou war an

[tu-gil.

Ha jabadao, ha cholori !

Gwelloc'h've bet d'ezo mont da c'hou-

[dori,

Rak d'an ampoent eur vandenn chas

A lakas an teodou lemm en o flas.

« Mignon, eme Voutig, klas en da

[zac'h,

« Klask da dro wella.

« Evidoun-me ne rin ket a grac'h :

« Sell ouzin ha gra kement-ma ! »

Ha kripa-krapa'bars eur wezenn.

Alanig paour, leun a c'houezenn,

A reas kant ha mil troidell,

Mont a reas e mil, e kant fornigell,

Trei a reas evel eur gornigell,

Siouaz en aner, satordidell !...

Anaout a rit ar chas bas-kein

O c'hof o ruza ouz ar vein ?

Alanig, en eun toull, flaer en e loerou,

A zantas alan unan war e dallherou.

Hag ar paourkêz dialanet

'N eur vont er-mêz' voe mac'hagnet.

Ne dalv ket em zifreta :

Klaskit higenn da besketa.

YANN GORRIGAN.



Korn ar Merour

Diouz ar pezh a hader, ec'h eoster, eman ar c'hiz da lavaret.

Mard'eo gwir kement-se evit ar pezh a zell ouz traou ar bed all, n'eo ket gwir alao evit ar pezh a zell ouz traou ar bed-man.

Gwelet a reomp bemdez, o vout da netra, traou bet savet gant an dud, dre galz poan...

An hader, eme an Aviel, a Yeas da hada. Teurel a reas, en e bark, had eus ar gwella... eun nebeudig hepken eus an had-se, koulskoude, a zougas eost : ar re a gouezas en douar mat. War an hent, en douar meinok, en douar gounezet gant al louzeier, an had a chomas difrouez.

Evelse e c'hoarvez gant komzou Done, hadet e park an eneou. Dre skanvadurez an dud, dre leziregezh, hap a bep seurt digarezioù fall, ar c'homzou-se a ya da goll.

Evelse es c'hoarvezet ive gant hor c'helaouenn.

Taslet hor boa, e park Breiz, had eleiz, had mat a zonje d'eomp. Edomp e miz mae, e barr an nevez amzer. Leun oamp a fizians. Padal an eost n'eo ket deuet, evel ma c'hortozemp. Evel e park an Aviel, an had a zo konezet ive war an hent, war ar vein, e-mesk ar strouez : eul ladenn hepken, krouezet en douar mat, en deus douget frouez...

Kroaz Breiz, aet eo koant, evel eur vleunenn, betek tiez eleiz a Vretoned, met ar re man, evel ma reas ar Juzevien da Vab ar baradoz, gwechall, o deus sarret outi dor o c'halon. N'o deus ket he digemeret.

Parrezioù a-bez a zo no deus degaset d'eomp koumanant ebet, skoazell ebet. Piou tamall ?

Ar wirtonez eo, n'eus ket deuet d'eomp a zour a-walc'h evit lakaat hor milin da vont en-dro hag e rankomp ober eur c'halvadenn ankenius d'hor mignoned leal.

Rivinet omp bet gant an diou niverenn genta.

1.500 lenner a zo deuet, an hanter muioc'h a vefe dleet d'eomp kaout, evit padout hag herzel ouz ar mizou spontus a slag ouzomp.

Piou ac' hanoc'h, mignoned ker, ne c'hellfe ket, gant eun tammig bolontevat, degas d'eomp eul lenner muisc'h.

Truez, me ho ped ouz ar merour paour, araok ma vezo aet e stal da stalig, hag e zouc'h da vinaoued...

Kroaz Breiz a zo eur benveg nevez etre hon daouarn, eur benveg, a yelo war wellaat, dre ma z'ay el labour.

Roit d'eomp an dourn, evit Doue hag ar vro !


LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : Mr l'abbé Jean-François Falc'hun, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz koumanantou ha profou, skriva da : Mr l'abbé Laurent Bleunven, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). C.C.P. 21.802, Rennes.

Ar merour : M. l'abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Mouleriez Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES



An Tour



Gwelet e vez a-bell
 tour ya fârréz, tour Plouzeniel!
 Eun nadoz
 gwintet war eun dorgennig,
 Tri rummad garidou,
 ha tri gloc'h,
 o kas dre ar vro
 meneg eus buhez an dud;
 tro ha tro
 laouen ha glae'haret...
 Kizellet eo, eun dudi!
 Kleuzet e pep feson,
 penaos 'talc'h en e zav?
 Doue hepken her goar
 a zo o chom harp ennañ.
 Eur gedour, atao sounn,
 en despet d'ar pevar avel!
 Eur frealz d'ar re a gred,
 eur rebech d'ar re faziet!
 Petra c'hoaz?
 E ur biz o tiskouez deomp an N av!

Yann Gor



← Tour Plouzeniel